



Martolodet ar Guilvinec

da

ZANTEZ ANNA

Diskan.

Da vartoloded ar Guilvinec
 Roït ho pennoz, Santez Anna,
 Hentchit hor bag a dreuz ar c'herreg
 Ma zeuimp d'ar porz da zouara (*bis*).

I

Ar vrud gaër euz ho madelez
 En hor c'henver-ni, tud a vor
 'Reas ho choaz da Batrounez
 D'ar Guilvinec, vit he henor !

II

Hon tudou koz, gant levenez
 Vel eur vam ho tigemeras
 Ha davetho, gant karantez
 Mam goz Jesus, c'houi a deuas.

III

Var ho lerc'h, ni ho bugale
A gass etrezoc'h hor pedenn
Eveldo, ni ho kar ive
E creiz peb joa ha peb anken.

IV

D'ar bugelik en he gavel
Ha d'he vam ouz hen luskellat
Roït bepred confort ha skoazell
Vit ma vezint kristenien vad.

V

Pa ranko mont hor c'hrenn botred
Da heul ho zad var ar mor doun
Diouz ar skuer fall hag ar pec'hed
C'hui ouïo diouall ho c'haloun.

VI

Deoc'h e goestlomp hor bugale,
Deoc'h hon tud iaouank ken nerzus,
Deoc'h hon tud coz, var hent ar be,
Deoc'h hor c'haloun, a da Jesus.

VII

Pa zeuio Jesus d'hor gervel
Dre vouez ar c'hloc'h d'an offisou
Evel guechall an Ebestel
Ni lezo bag ha rouejou.

VIII

Da zul gant joa ni ziredo
Etrezek hon iliz parrez
Evit ho saludi eno
Ha diskuez deoc'h hor c'harantez !

IX

En hor bagou, ni zaoulino
Mintin ha noz, vit ho pedi
Digant Jesus, en hoc'h hano
Ni hor bo boued da dud hon ti !

X

Diouz hor bagou, ni bellaio
Ha diouz hon tiegeziou ive
Ar scridou a zoug ar maro
Hag ar poezoun en hon ene.

XI

En despet d'ar pezh a laro
An dud dizacr, d'hon touella
Hor feiz bepred ni a viro
Gant ho sikour, Santez Anna.

XII

Chomit ganeomp da Batrounez,
Mari ho merc'h da Rouanez,
Jesus da Vestr en hor bagou,
Muioc'h c'hoaz en hor c'halonou.

XIII

Beillit bepred, ha de, ha noz
Var ar porz-mor en dro d'ho ti
Deoc'h ni lavaro mil bennoz.
Holl e canimp ho meuleudi !



Imprimatur :

Quimper, le 13 Janvier 1910.

EM. FLEITER, *vic. gén.*